

Recit giirion

(362, suite)

Demeus ar maleurion horrubl occasionet dre ar
voiturion a vateur, etre Belru ha Meudon, tost
da Baris, vandro 6 heur ha gant eus an abardaez,
d'ar sul 8 demeus a vis mae present 1842.

Var ton : Spered-Santel, m'ho ped.

Breizis, va c'henvrois, tostait da glêvet
Recita maleurion diverza c'hoarvezet;
Prestit hoc'h attantion, preparit hoc'h eneon
D'ar recit truezus corguet a valeurion.

Mes gent dont da gommanç, goulennomp, christenien,
C'houi an nery, d'am selaou, ha me ar sclêrijer
Da explica reizamant maleurion eus ar goassa,
A rai d'ho calonou gant glac'har premissa.

(363)

Diou voitur a vateur, locomotiv hanvet,
A dreine wagonion a voa outo staguet,
Pa deuas un ael car qerqent d'en em direnji,
Ha da verza penn-caus a valeurion goal gri.

An tãn a grogas prest ha gant nery a zaillas
Hac a dreuz hac a hed gant ur fulor goal vras;
Maleurusamant e voa serret an oll stalafou,
Ar peyz en deus cresqet an nombr a victimou.

Considerit, m'ho ped, daou c'hant den bern ouz bern,
Arzjouc'h un tan horrubl evel tan an ifern!
Sonjit en tourmanchon cris a zouffront oll a bep tu
Gent beza reduizet en glaou hac en ludu!

(364)

Ar spouron horrerus, an terrubl disesper
A rene e peb car ha vandro en antier;
Oll e clasqet digueri ar stalafou, vit saillat
Var an hent, vit ellout clasq en em savetat.

Mes, ô Salver Jesus! ret eo d'ê perissa
 Dre eur maro euzus ha demeus ar c'brissa....
 Darn en tan zo devoret, darn all a zo divempret:
 Var bord daou c'hant maro a zo dija contet.

Pa voe ellet neuze tostet eus ar reus bras,
 Peb calon gant horrol eno a fremissas
 O contemphi an arvest gen euzus a voa eno:
 Dre oll voa lodennou a vemprou tud maro.

(365) Amâ vije caret eun dorn, eun troad, eur gar;
 Pelloc'h, eur penn, eur vrec'h pladet var an douar;
 Tud a velet en o za, rentet en glaou, en ludu,
 Hac a goeze en poultre vel m'o zouchet diouc'h-tu.

Ar prefet a boliz gemennet eus a ze,
 Gant ugent medecin en em gar prest neuze.
 An dud blesset voe franset gant calz a attantion,
 Ha deposet qerqent er c'hastel a Veudon.

Restajou corfou voe dastimet ha casset
 Gant veneration d'an douar beniguet;
 Gen horruhl voa dishanar ar restajou a gorfou,
 N'ellet get gout piou voant nac an tamou memprou.

N'eller get niveri an dud a zo lazet,
 Na gen nebeut gouzout an nombr a re vlesset:
 Credi rêr e zeus maro d'an nebeuta daou c'hant den....
 Pebes glac'har d'o zud, sonjit mad, christenien!

(366) Dre ma zeo impossibl dont amâ da nombri
 Gement zo diguezet en eur maleur qer cri,
 E zan da essat bremâ da rei da anavezout
 Eun darn hep qen, mes hep dont d'o explica tout.

Ar vaillant amiral Dumont-d'Urville voa bet
 Diou vech eurusamant oc'h ober tro ar bed,
 Ha distro, dre c'hraç Doue, hep nep fachus accident,
 Etouez e quenvrois gant calz contantamant.

Da Versaill e voa êt gant e bried caret,

Hac e vab, yaouanc c'hoas, a garric calz meurbet :
 O zri e zint antreet ebars voitur ar vaeur,
 Hac o zri int, allas ! victim eus ar maleur....

Eur zoudard ancien eus an tan difframet,
 A voa c'hoas en bue, mes gant eur vrec'h torret ;
 E gostez a voa blesset, hac e dal voa leun voad.
 Rei a rejot dezàn peb sewit sicour timat.

« Oh ! lezjit ac'hanon, a gri a vouez nerzuz :
 » Sellit... na zouffran get, dre ar c'hraç a Jesus ; (367)
 » Mes hastit prest, m'ho suppli, da zicour va mab, va breur...
 » Savetai va buguel, m'ho ped, diouz ar maleur. »

Eur vreg yaouanq a voe tennet demeus an tan
 A grie a druez : « Savetai buan
 » Va fried paour zo arze, ha grit mat attention
 » Eo eget en remerq d'e zecoration. »

Allas ! ar vreguic qez certen na vouie get
 E voa e fried paour ouz e zreid oll dêvet !
 Dre vouir druez diouti, e gorf goloet souden,
 Er c'huz d'e daoulagad, a bella e anqen.

Eur prefet zo dêvet. Hac un autrou yaouanc
 A red dre ruyou Sevr, follet ha meurbet blanc,
 O crial aboez e benn : « Rentit din va mam, va zad,
 » Va c'hoaric paour ive... M'ho recompañje mad. »

Famillou en antier a zo bet distrujet ; (368)
 An dud maro a zo d'ar vèzejou casset.
 Gardou a enor a voa laget bars e peb bêret,
 Da zepord ma vije an dud paour entêret.

Biscoas na voe muioc'h a generosité
 A vercou calon vad nac a humanité.
 Carout a rafemp henvel amâ an oll a voa deut
 Da zicour, mes tachomp da henvel un nebeut.

An autrou Thevenot, e Paris imprimer,
 Autrou Demorien, Demaison, Frantz, Cartier,

Sachera, La Croix, Seigneur, Martin, Calicot, Hure,
O deus sicouret calz er maleur horruubl se.

Gant eur soign ar vrassa, calz a seurezet gris,
Arc'hescop a Baris, an oll dud a Ilis,
A velet hep heani o sicour, o soulaji
Hac implich peb moyen evit o c'honsoli.

(367) Benediction Doue ra deuyo varnezo
Ha var quement hini en em gawe eno.
Pedomp Doue vit boneur an dud generus, humen
Zo en em gunduet evel quier cristenien.

Oll famill ar Roue, raetal m'e deus clêvet
Comz eus ar maleurion pere voa erruet,
A zo prest en em herstet da gass d'e soulajamant
Dre hep-seurt moyenou, hep dale un instant.

Pedomp oll, cristenien, evit an dud lazet,
Vit soulajamant prompt ar re a zo blesset.
Doue a zelaou atao eur beden grêt a galon,
Pa zeo d'e Vajeste grêt gant devotion.

A. Lédan.

(Vol. VI, p. 362-369.)
27 str. numérotées.